

(489)

Chanson.

Pa grouas Doue ar bed-mâ, en devoa predestinet
 Demeus a bep etèrnité petra vije c'hoarvezet;
 Toget en devoas bet e chang, er bed-mâ da bepini,
 Ha destinet dezàn an andret elec'h ma carje anezi.

Un day a vez bet en Indes hac a arvu tost d'ar quèr,
 Corguet gantàn e vatimant, mes c'hoas e vès en danger,
 Eic'h arvu ur roc'h maleurus pe un tempest benaget,
 Hac a rzistruk ar vatimant, cetu ar pilot collet.

M' em boa ur veach da ober, ne voa get pell eus ar quèr;
 C'hoant em boa da vont da Baris, mes e voaz c'hoas en danger,
 C'hoant em boa da vont da Baris d'antren en theologi,
 P'o cuelis e Sant-Nicolas, va mestrezic Pelagi.

(490)

Gant ur zell eus ho taoulagad e freshoc'h va batimant,
 E tispreujoc'h va oll levriou hac em renjot languissant;
 Ha me hac o return ger prest, evel pa vijen chanchet,
 Demeus ar veach a Baris pini em boa anteprenet.

Goass eo ho sellou, va mestrez, ezuet re ar c'hrocodil
 A laz an dud dre e zellou, a laz calz a dud habil;
 Mes ar rese gant ar maro a achu o affetchou,
 Mes ar blesseur ameus trapet birvigen fin na devo.

Hippolit antret en histor, pa zeuas da quitat Juli,
 En em livras d'an desper; me ra ive, Pelagi;
 Mar tefac'h da vont outraget evit va occasion
 Gant hirvout ha displijadur compach eus va c'halon.

Me c'hoare ganèn, va mestrez, evel gant ar maurius,

288

Pa all blessa 'n hini er blesas, c'hoas en em gar den euruz;
 Joais evel ur rossignol, pa ve arvu ar mis mae,
 A zeu d'ancouât e boanion, ha da gana a neve.

Ha c'houi oc'h eus sonch, va mestrez, eus ar pezh a laris d'ec'h
 En deiz diaroc ar pardon var tachen Sant-Nicolas?
 O pezhit sonch eus va c'homzou, me am bezo deus hore,
 Va lizerou a vo testou demeus va fidelite.

(491)

Clévet e meus d'ec'h lavaret yec'h d'ar gouent da Bontévi,
 En eur distrez deus an Naonet, me a yel d'ho quelet dy:
 En eur distrez deus an Naonet me a yel dy d'ho quelet:
 Adieu eta, va Félagi, va douç, va muia caret.

(Vol. II, p. 489-491.)
 9 str. numérotées.